

SONIOU KOZ

RISQUE-LA-MONTAGNE



Ma zad ma mam o doa ma-dou Bre-man gant ka-
ran-te Ma zad ma mam o doa ma-dou Bre-man gant ka-
ran-te... Hag am c'hasas d'ar sko-la-jou Laouen la
per-son la kerent ha mi-gnoned Risque la mon - ta - gne.

Ma zad, ma mam o doa madou { *bis.*
Breman gant karante,
Hag am c'hasas d'ar skolajou,
Laouen la, person la,
Kerent ha mignoned, risque-la-montagne. (*bis*)

D'ar skolajou 'vit bout belek ;
Mez ma c'halon bermete ket.

Na bout na belek na manac'h ;
Ma c'halonik a gar eur plac'h.

Pa 'c'h e ar re-all d'ar studi,
Me ye war ar ru da c'hoari.

Ma zad, ma mam, p'o deuz klevet,
Pesort a lapous am oa gret,

O deuz kaset d'in eul lizer,
Da zont da labourat d'ar gêr.

Kerse 'vo gant ma c'hosteou,
Mêrat an tranch hag ar paliou,

'Kichen bout 'barz ar seminer,
O lakat liou war ar paper.

Yves Hamon
G.B.I. #. 292.

Ar bla warlerc'h, me oa dimêt ;
Eur vraz a blac'hik am oa bet,

Hi he doa pemp kant skoed leve,
Ha me kement-all a-peu-pre.

Ar bla warlerc'h 'oant lipet tout,
Sac'h ar vizer 'oa war ma chouk !

Roet ha kanet da *Groaz ar Vretoned*
gant eur C'hernevad.

